

C H A N S O N

*E t r a daou zen ac o defe an amitie barfet an eil
evit eguile, a po defe ar maleur da veza dispar-
tiet e ven chagrinet bras.*

Quemen tra so er bed, Tout a zeziront doc'h,
Ya, ma ven demeet, ac ed da chom gueneoc'h. Tut
cos a tut yaouanc, Deut da chilaou va c'hlemou,
Roit din mar c'heus voyen, Remed eus va zourmanchou,
Allas difficil eo soulagi o clenvet, Eus on tourmant
quer cri, N'en deus quet a remed.

Me maleürussa den, So bed biscoas er bed-mañ,
Hirio e mon joaüs, Hac er choas e vin e poan,
Me yal da di dadi, Mesq an den charitabl, Evit
ma c'honsoli, Em etat deplorabl.

Evel ur rossignol, Ha dious nos ha dious mintin,
Evel d'an drujunel, Queit ha ma pad e anel, Me
na songe quet din, E teuse ar maro, Da lemel
diganin, Hini garen muyo.

Quitet emeus ma far, Quitet emeus ma fianç,
Quitet eo va mignon, Quitet eo va esperanç, Nam
beus mui a souten, Adieu d'am plijadur, Cetu int
colet tout, En ur ober un eur.

M'em beus ur feunteunic, Bars e cornic ma jardin,
E ven cavet enni, Ha dious nos ha dious mintin,
Em parti va hunan, E mez a vesq gant dud,
D'ober va demeuranç, E mesq gant loenet mud.

An douster eus an dour, O redec dre ar goueyou,
Heurtet ha diheurtet, Dre doues ar veignigou, A
zeu da zigaç song din, A zouster va mignon, Bep
heur ha bep moment, Da biqua va c'halon.

8

Chaden an amitie, Chadonn'ic a garante, Red
e vez coer pe blom, Queit a ma monto huse, Au
ouarn hac an dir, A us gant an amsez, Ur garante
barfet, jamæs ancounac'het.

Evel d'an tolennou, Ar potret eus ar beyou,
Ar froesigou brein coet, Dindan ar gueigou, A
represant e c'horf, En douar anterret, Hec e es-
quernigou, Crignet gant ar prinvet.

Desir meus ur vech c'hoas, Ya evit e guele,et,
Sempli ra va c'halon, Na bep heur na bep moment,
Red eo gortos an eur, Ma blijjo gant Done, O
lacet assambles, Hed on eternite !...

FIN.

E QUEMPER, eus an Imprimiri S. BLOT.